

Potred Breiz-Izel en Americ

Chanson brezonek var eun ton anavezet

1. Breman pa z'eo deut ar goañv dister ar labourio
Evil tremen va amzer, a gompizan sonio.

2. N'oun ket na barz na belec, na ker neubend skrivagnour
Mar teuan da fazia, me o ped d'am zikour.

3. Da zibuna dirazoc'h, ar pez zo n'em speret
Euz ar sklera ma hellin, evit beza comprened

4. Monet rin digant va hent, o sellet an daou du
Skei a rin gant va daou zorn, elec'h ma kavin an tu

5. Peb, lec'h ma vellin an droug, dimeuz an daou gostez
Me en lavaro dizamant, pa vo ar wirionez

6. Dimeuz potred Breiz-Izel, a gomzin d'eoc'h hirio
Pere zo deut d'an Americ, da hounid dollario

7. Kuittet a n'eump Breiz-Izel, kaëra bro zo er bed
Bevi reomp en esperanc, da vont h'oaz d'e guellet!

8. Mez kalet eo ar vuez, en amzer m'omp breman
Ar bevanz a zo ken ker, dister ar baëamant

9. Ar bevanz a zo ken ker, ag an dillad ive
Ma n'hell mui or labourer, sevel mad e vugale

10. Kuittet a n'eump anezi, evit eur pennad Amzer
Evit beva evrusoc'h, pa zistrofomp d'ar ger

11. Treuzet a n'eump ar mor braz, evel guir vortoloded
Diskenned e pouz New-York, brasa ker zo er bed

12. Setu-ta ni digouezed, ebarz ar vro neve
Ebarz bro an uzinou, hanved an New-Jersey

13. Da genta lavarinn d'eoc'h on doare da veva
Or faeson da en engemer dimeuz an digousta

14. Bevi a reomp assemblez, evel d'ar zoudarded
O ren buez ar Riñtain, evel m'a zomp hanved.

15. N'hellomp ket mont d'an hôtel, da zrebi or prejo
Pe aotramant on arhant, etre on daouarn a deuzo

16. Pa z'omp deut keit-man euz ar ger, da hounid dollario
N'eo ket evit o dispign, ebarz an ostaleurio

17. Na zeuit ket d'an Americ, da glask o plujadur
Aman 'vit gounid arhant, a renker beza fur.

18. Beza fur a labourat, koulz an dez ag an noz
Eb gelloud kaout avecho, eur momant da renoz

19. Ober beb seurt labourio, re louz a re gallet
Labourio skuizuz d'ar horf, pe noazuz d'ar ie'hed

20. Tremen gant eun tam bara euz ar mintin tre d'an noz
Na peuz evit e lonka, nemed guin ar baradoz

21. Dimeuz ar haëra lapoused, a glevomp hanoio
Salesmanbitch a crazy, a re all diganto

22. Mez n'omp ket deut d'an Americ, var zigarez pourmen
Deut e z'omp da labourat, a gounid gueneien.

23. Darn ahanomp zo dimezed, neuz greg a bugale
Sonjit barz ar galonad, tont da guittad an'e.

24. Seblantout a ra d'eomp, h'oaz guellet anezo
An dour en'o daoulagad, lavaret d'eomp kenavo

25. Klevet ran lod lavaret, e z'omp tud dirollet
Tud n'a garont ket o famill, a memez tud kollet

26. Mez me a lavar ar h'ontrol, eo an dud kaloneka
Eo a zo deut d'an Americ, da hounid peadra

27. Da zevel mad o bugale, rei d'ezo deskadurez
A n'em zevel o'hunaan, dimeuz an dienez

28. Rei d'ezo deskadurez vad, ag eun tamig danvez
A rai d'ezo kalez sikour, pa iefont er vuez

29. Labourat 'vit o pugale, kaëra tra zo er bed
Ag a ra d'eoc'h nerz kalon, pa vezoc'h ankeniet.

30. Dever eun tad a famill, m'a n'eo ket kemense
Me a bed an hini a oar, d'en lavaret din'me

31. Ag me a heuillo e avis, ar fidela m'a hellin
Rag bepred eun avis mad, neuz gret plujadur din

32. Be a z'euz eun neubendig, 'ma diganto o famill
Berroc'h kavont o Amzer, o tremen o exil

33. Potred yaouanc a z'euz ive, a vije dimezed
Mag en dijen bed danvez, arog ma oant partiet

34. Darn e'ma o mestrezed, bepred euz o gortoz
A pa zistrofont d'ar ger, en 'ofont o mennoz

35. Abalamour d'eun tam arhant, gounezed en Americ
Ar ré goz a vo kontant, vezo gret eun neizic

36. Etre an daou zen yaouanc, a neuz bepred n'em garet
Ne oa nemed an arhant, en d'oa o separet

37. Kalz ré all a zo deut h'oaz, da hounid dollario
Evit kaout eur vec'h tiegez, pa zistrofont an dro

38. Ag n'em gonsoli a reont, o kavet hir a amzer
O soujal er blujadur, pa n'emgafont er ger

39. Me o ped potred yaouanc, pere zo h'oaz 'n'o pro
Da zilaou gant interest, darn dimeuz va homzo

40. A goude pezo lenned, pe kanned va janson
Houi a raio euz o kiz, goude reflexion

41. Houi pere zo ataked, gant kleved an dansou
Me o ped da zont aman, ag a kavoc'h louzou

42. Me o ped da zont aman, eun neubeud bloaveziou
Da ziskuiza o tiwisker, dimeuz an ebatou

43. N'anavezan ket eur breizad, a neufe gret eun danç
Digant eur miss pe eur Lady, Abaoue neuz kuittet Franç

44. Pa grog en'o ar fantaisi, da vont d'eur bal er ker
Pa n'ouzont ket speak english, neuz netra da ober.

45. Neuze zistroont d'ar ger, evel chass dilosted
A n'em glozont en e'hamp, da zonjal n'o mestrezed

46. Pere zo chomed e Breiz, an tu all d'ar mor braz
Martreze n'ont ar bonheur, da vont d'o guellet h'oarz

47. Sete aze mignoned, a zo fin d'am janson
Euz o klevet e h'ana, m'o konzolasion

48. Kredi ran m'euz lavaret, ar wirionez pen-dre-ben
Var an droug a var ar vad, hervez va reolen

49. A breman lezan peb hini, da dema konkluzion
Dimeuz an oll prepoziou, scribed en 'em janson

50. Komposed gant eur Breizad, o chom e Paterson
O kavet hir e Amzer, kontristad a galon

51. Evit nompaz n'em ziskleria, va haño n'a larin ket
Lavaret rin seulamant, ouneuz Briec-de-l'odet

52. Ganed e parrqz Santoz, en 'eur ger var an huel
Destined da voyaji, a vihanic n'em havel

53. Euz an eill korn d'egile, meuz guellet Breiz-Izel
A digouezed en Americ, pouzset gant an avel

Fin.

Eur breizad en Americ.